

# NIDIAD

Priz : 5.00€

Die Philosophen  
haben die Welt  
nur verschieden  
interpretiert es  
kann drauf an,  
sie zu verändern



## Pennad-stur

### *Eil lankad*

Gant pluennoù sioul ha fin eo bet skrivet, evit an ampoent, an hollad testennoù a sturias hon oberennoù, a-hed pajennoù ha follennoù ar bloavezhioù tremenet. Kredet hon eus e rankemp lezel da gomz mouezhioù ha gerioù prim. Un eskemm zo bet loc'het etrezomp ha lavar hon bed. Ha dre awen ar barzh, dre gerzhenn al lavarer, hon eus kredet pediñ an dud da vont ganimp er c'horoll-se. Ha tud 'zo o deus klevet heklevioù kanaouennoù ar c'helc'hiad.

Met evel ar barzh, evel ar prederour, an Nidiad ne c'hell ket chom difin e latar an awen. An Nidiad a grou, an Nidiad a zezev hag a ergerzh. Met an Nidiad zo da gentañ penn un oberer a sav hag a ra a load da load, a gelc'hiad da gelc'hiad. Ha pep latar a varv, zoken da geñver skedoù kufunek ar goañv.

Davit lankadoù nevez, davit follennoù ken duet hag ar re dremenet, e kemmomp azon hon awen. Diviz ebet amañ, nemet sujidgezh d'al lavar hon stur a frankizenn da frankizenn.

Nidiad

### *Trugarez da :*

Yann Ber Quirion  
Gaël Barret-Le Masson

**Evit ar skoazell en deus kaset dimp.**

### *Strollad Skridaozerezh*

Malo Adeux  
Manon Le Gourrierec  
Gwendal Piégais

# Krennva

## I. Barzhonegoù

*Ar vogidell vev* ..... P.5

*Hael* ..... P.6

## II. Spered Plaen

*Al lennegezh proletarian, un arz a renkad* ..... P.8

## III. Prederouriezh

*Lizhiri Karl Marx da Vera Zasoulitch* ..... P.20

Goloenn : Gaël Barret-Le Masson  
Pajennaosañ : Gwenegan Ar C'haer

# Barzhonegoù

## Ar vogidell vev

War runell al lannegoù glas  
E striv an dastum hag ar c'hutuilh  
Hon eus klevet fraoñv ha froum  
Un hengoumoulenn distroet  
War zouar he zroioù kaer kent.

Brug, gwinienn ha dervenn  
Gwrizienn kement hag askoll  
Glasenn dibad pe trebad, hiziv,  
A glemm dirak brini ha pabored  
A gren war barlenn al lanneg.

Pleg glas ouzh kabell gwenn  
Las ha lien a stard hag a c'holo  
Korf ankeniet hon douar labouret.  
An avalenneg a oar hag an den a striv  
War runell ul lanneg vanet.

Fraoñv ha gwigour a dosta  
ha kreñv ouzh kreñv  
Eo kan ar vogidell vev.  
Ur goumoulenn breudeur daonet,  
Karvig brug ha karv lann  
A zegas ul lanv skuizh ha sinac'h.

Gwendal Piégais

## Hael

Hael !  
 n'out ket  
 kement ha ma lârez.  
 Bemdez o vont aze, atav o vont amañ,  
 koll a rez da amzer  
 ha da hent  
 o vont war-lerc'h un dra  
 n'eus ket anezhañ.

Hael ! ne vo den ebet  
 o vont war da hent ;  
 tec'hout enta n'eo ken  
 Pezh a rez, a lavarez  
 Pezh a gredez krediñ,  
 a gredez e karez.

Tec'hout a rez hacl  
 diouzh lezenn ar vuhez ;  
 hini da blanedenn  
 ha hini da askre.  
 Al lezenn a rankez  
 adkavout ha selaou  
 Lavar hen an neved  
 adlakaat prim e 'z piaou.

Evit ma adsavo  
 nevezamzer ar bed ;  
 levenez er maeziou  
 ha peoc'h er brezel ;  
 Evit ma paouezo  
 ar gouelec'h a greskiñ  
 'vit mirout ouzh an droug  
 a zistreiñ ;  
 Evit ma teuy an aod  
 da vezañ hon lezenn  
 'vit ma tistroy 'n denion  
 da berc'henn ;

Evit an holl draoù-se  
 eo e rankez distreiñ  
 Hael, va c'hencil ker !  
 e-touez ar re vennet ;  
 dellezout a rankez  
 an anv a zougez  
 hini ar Rouaned  
 N'o disoñj ket.

Pediñ a ran atav !  
 o c'hoanagiñ bepred  
 Te 'oar e 'z kortozin  
 War ribl ar stêr.

Malo Adeux  
 Reykjavík, d'ar 4 C'hwevrer 2014

## Spered Plaen

### Al lennegezh proletarian, un arz a renkad

En deroù-kentañ

Tro dro d'ar bloavezioù 20 e teu a-wel an adanv « proletarian »<sup>1</sup> hag a spisa an doare lennegel-mañ tro dro d'ar bloavezhioù 20. Ar ger a denn eus ar varksouriezh, savet diwar ar ger rusek *proletkult*, daoust ma n'eo ket staget ouzh Marx an holl skrivagnerion anvet « proletarian ». Savet gant kouerion, micherourion, mengleuzierion, skolaerion ha kazetennerion izelek, kavet e vo o anaoudegezh uhelañ etre an daou vrezel. Met ur vrud ken dister ne aotreo biken hini ebet anezho bevañ diwar e skritur. Gant testenn Henry Poulaille<sup>2</sup>, *Oad lennegel nevez*<sup>3</sup>, e vo graet ul « luskad » gant al lennegezh-se. Dianavezet gant ar bobl e chomo avat daoust m'eo outi e venne komz.

Neoazh, pell eo a vout nevez. A-hed ar Grennamzer e veze graet kanaouennoù micherioù<sup>4</sup> pe kompagnunel, evel al lennegezh vale a dalveze da skor evit skritur ar bobl. Krouidigezhioù ar bobl a veze skignet a-drugarez d'ar misterioù, d'ar c'hoariva ha da *dits* (pezhioù tost da gevellennoù pe danevelloù o komz eus ar pemdez) ar c'horfuniadoù hag ar breuriezhoù. *Dits* ar micherioù a veze dibunet dirak izili ar c'hevredadoù hag a gomze eus o oberennoù pe traoù liammet outo. *Le Dit des cordonniers*, da skouer, a zeskriev poanioù ar « fallvotaouidi ». An almanagoù hag al lennegezh vale (Gl. *littérature de colportage*) a vez kavet ivez. Charles Nisard, karget gant Napoléon III d'ober roll al levrioù pobl, a sav ar renabl kentañ anezho. Daoust m'eo fonnus a-walc'h an danevell, e vo kospet an danvez-se evel « gwall levrioù ». Un nebeud bloavezhioù war-lerc'h ez eo ar skrivagnerion romantelour a drid gant al « levraoueg c'hlas », ul lennegezh-pobl anvet evel henn en abeg da liv

1 Diwar an droienn c'hallek « *littérature prolétarienne* » hon eus kredet kinnig an droienn « lennegezh proletarian » evit ar pennad-mañ hag hon imboure' hioù da heul.

2 Ganet e Pariz met a orin eus Naoned, mab d'ur c'halez anvelour ha d'ur galficherez-kador eo. Emzivad da 14 vloaz, labour a ra en embannadurioù Grasset da gentañ ha Valois da heul, e-lec'h ma kaso e stourm evit al lennegezh proletarian. Sevel a ra meur a gelaouenn : *Nouvel âge littéraire*, *Nouvel âge*, *Proletariat*, *A contre courant*, *Maintenant* hag ivez *Le Cercle du soir*, kelc'h proletarian levraoueg ha tachad rendael war un dro. Nac'h a ra emezelañ er Strollad Komunour ha taget eo ganto goude Kendalc'h Kharkov.

3 Henry Poulaille, *Nouvel âge d'or littéraire*, Levrstal Valois, Pariz, 1930.

4 E-barzh ar rummad-mañ e kaver ivez kanaouennoù gwiadiñ (Gl. *chansons de toile* pe *chansons d'histoire*), stumm lennegel ar Grennamzer. Kanet e veze ar c'hanaouennoù-se gant ar merc'hed a-hed an devezh-labour. *La plainte des ouvrières*, dastumet e 1170 gant Chrétien de Troyes eo hag a ro ar roud koshañ a zo bet kavet.

goloennoù al levrioù ha deuet war wel abaoe ar XVII<sup>vet</sup> kantved. Skrivagnerion 'zo evel Balzac, Hugo pe Michelet, a denn o danvez eus al levrioù stroll-se hag a glask lakaat mennozhioù dispac'hel en o zouez. A-raok bout kospet dindan gwask an Eil Impalaeriezh, al lennegezh-se oa skignetoc'h eget forzh peseurt lennegezh vondian. En almanagoù-se e veze kavet kevellennoù, fablennoù, farsadennoù, divinadelloù, pleustradoù mezekniezh, sekredoù keginouriezh pe c'hoazh pedennoù, sarmonioù lous ha remedoù a-enep ar pec'hedoù. Spesadelezh ar skrivagnerion proletarian eus deroù an XX<sup>vet</sup> kantved eo ar youl bodañ ar gomz pobl en ur gelennadurezh arzel ha kevredadel. Fellout a ra dezho lakaat da ziwanañ un « arz a renkad » nevez, kresket eus an douar gant dorn an hini a labour an tostañ dezhañ.

Daoust ma oa bet didalvouddekaet betek henn lizhiri ar boblañs – evit na lavarout kuzhet da vat –, ar gelaouenn *Monde* a gemenn un enklask e miz Eost 1928 da c'houlennata al lennegezh proletarian. Berzh a c'hounez an enklask-se a laka al lennegezh-pobl e kreiz breutadeg an dachenn lennegel. Poent eo da skrivagnerion ar renkadoù izelañ lakaat o oberennoù a-wel an holl ha klask reizhwiriegezh dre arc'hañ « dispac'helled »<sup>5</sup> o difraoù. Henry Poulaille a skriv e vanifesto e Frañs hag Augustin Habaru<sup>6</sup> e hini e Belgia, e-lec'h ma vo kavet gant al lennegezh proletarian an dachenn badusañ d'he frezeg.

An arnod-se a glask reiñ d'ar broleteriezh un arz dezhi he unan, un arz o kemer perzh en he dishualerezh hag oc'h enaouiñ un emouez. Bleuniadur ar vicherourion eo a vez klasket evit na zeuint da vout na sklav na bourc'hiz d'o zro. Met an intruduse n'eo ket aet digudenn.

Ul lennegezh gant ar vicherourion evito o unan ? En ur mare ma ne vez lennet gant an dornvicherourion nemet romantoù diduant ha romantoù kazetenn ur wech an amzer ? Emc'houlenn a c'haller penaos e fell d'ar skrivagnerion vicherour pellaat diouzh pezh a vez skignet endeo gant al lennegezh Veur. Ha pa vefe gallus, penaos e teu a-benn ur micherour pe ur c'houer da zont da vout ur skrivagner ?

Evezhiadenn André Gide : « keit ha m'emeur pleustret da vevañ, ne gavor biken amzer da skrivañ » pe hini Julien Benda : « Un dorn kaledennek ne c'hall skrivañ biken » a gomz a-zivout ur wirionez kevredadel, ur wirionez a c'hell emplegañ un nemedenn avat. Met arabat emdouellañ : an amplegad kentañ evit an hini a skriv eo bout embannet, ha gant an embanner brudetañ ar gwellañ m'en deus c'hoant tizhout ur c'hevredig ledan. Hag evel just, respont a ra an embann da vlazoù ur c'hevredig dibar, da lavarout eo an hini splotusañ : ar renkadoù etre hag uhelañ. Penaos dont d'al lennegezh hep drevezañ anezhi neuze ?

5 Diwar an nevezc'her gallek *révolutionnarité* eo savet ar ger-mañ.

6 Augustin Habaru (1898-1944) zo un Arlonnad yaouank tost d'an SK. Mab un ardivinker eo, aet da gazetenn evit kelaouennoù proletarian. Savet en deus ar c'hoariva proleter e Belgia. Harzet ha fuzuilhet gant ar Gestapo, dalc'het ez eus soñj anezhañ dre e vanifesto tost d'ar varksouriezh : *Notre Position*.

Daoust m'eo bet Henry Poulaille o klask sevel lennerion dre gelaouennoù ha manifestoù, kudennek e vo embann oberennoù ar vicherourion. An arnoù evit sevel tiez-embann dezho ne badint ket pell ha war-du an embannadurioù komunour « Editions Sociales Internationales » an hini eo e klasko ar vicherourion lakaat da embann o zestennoù. Zoken ganto e vo diaes dezho kavout o lennerion. O nesañ ketpared, dalc'het gant al lennegezh diduant, ne vezont ket hevelep lennegezh testeni, pe nebeut tre. « Breudeur va renk ne lennont ket, un dezoud eo. Ha dreist holl pezh a skrivan me, unan anezho »<sup>7</sup>.

Asantiñ d'ar reolad : setu pezh a c'hortoz an tiez-embann digant o skrivagnerion. Ha peogwir eo 12 lur priz keitat ul levr e 1930 – da lavarout eo un hanter zevezh labour evit ar micherour perzhe frañsez –, anat eo ne c'haller bet mont hebiou da sevenadur bourc'hiz ar skrivagnerion evit bezañ embannet. An kez sevenadur eo a dermen ar reoladoù, ar modoù eztaol ha tuadur un oberenn. Ent stadegel, al lennegezh a-zivout karantez ar vondianed eo a drec'h atav daoust ma 'z eus e Frañs 14 milion a vicherour, 30 milion gant o familh, d'ar mare-se. « 30 milion a labourer a zalc'h nebeutoc'h a lec'h el lennegezh eget ar Faubourg St Germain »<sup>8</sup>. Bez' ez eus un dachenn da aloubiñ ; ar bobleourion hag ar broletarianed a glasko he gounit, pep hini e zoare. Dalc'het gant ar c'hoant da sevel ha da ginnig ur sevenadur d'ar bobl eviti he unan, ar vicherourion a fell dezho krouiñ gant ar bobl, dre ar bobl hag eviti, arc'hañ he flas en Arz ha gronnañ un ensavadur a nac'h komz diwar o fenn. Kinnig un derc'hennadur eus ur renk adizeloc'h gwelet ganti he unan eo ar pal p'emañ al lennegezh aloubet gant emzerc'hennadurioù ar vourc'hizelezh hepken. Ent stadegel, al lennegezh a-zivout karantez ar vondianed eo a drec'h atav.

Pezh a gont da gentañ eo dilested an testeni ha neuze orin kevredigezhel ar skrivagner. Alies a-walc'h e vez diarbennet braventez an destenn evit lakaat an orin-se war wel ha pouezañ warni. Daoust da se e chom lod eus skrivagnerion al luskad o keneñ kaoz ar perzhioù lennegezh<sup>9</sup>. Pezh a c'haller merzhout eo e seblant pouezusoc'h an doare da leurenañ an dezrevell eget skodoù furmel. Ar pal kentañ eo lakaat ar vicherourion da skrivañ diwar-benn o buhez pemdeziek met en tu all da se, ur gwir labour imboureñ eo hag a zo kaset, ken damkanel, ken pleustrek, da arnodiñ ha savelañ pezh e vo aroueziadurioù an arz renkadel nevez-se<sup>10</sup>. Buan a-walc'h, goulenn ar stil eo a vez lakaet en a-raok. Darnvuiañ ar skrivagnerion, dre o orin, n'int ket bet savet pell er skol ha levezonet int gant ar patrom naturelour, *Germinal* gant Zola pergen. Penaos krouiñ un dibarded a 'n dezrevell alese hep eilsammañ bonegoù an

7 Meneget in *Autour d'Henry Poulaille et de la littérature prolétarienne*, Universited Provañs, dastumad Textuelles littérature, Aix en Provence, 2003, p. 14 [brezhoneg ganimp].

8 Serge Victor, *Littérature & Révolution*, François Maspero, Paris, 1976, p. 32 [brezhoneg ganimp].

9 Ar maengleuzier Constant Malva ne fell dezhañ meizañ e destennoù nemet keñver-ouzh-keñver re Zola pe Céline. Reoù 'zo a vag un diviz dibaouez a-zivout arouez-varn un oberenn arzel. Daoust ha lakaat ar pouez a ranker war ar perzhioù kenedus pe orin ar skrivagner ?

10 St. Marcel Martinet, « L'art de classe », in *L'Effort Libre*, Mezheven 1913.

naturelouriezh, se en ur zerc'hel gant dilested an dezrevell ? Penaos lakaat buhez valañjerek ar micherour da vout un danvez lennadenn evit an holl ?

### Politikourion e kreiz an hent

P'eo embannet e vanifesto gant Henry Poulaille, e vennoz eo sklaeraat e zibaboù a-zivout al lennegezh, ha dreist holl ar meizadur anpolitikel en deus anezhi hag eus ar skritur broletarian. Hervezañ eo a bouez chom hep sujañ lennegezh ar bobl d'ur gealiadurezh pe d'ur strollad politikel, chom hep emc'houleviañ evit chom hep digreskiñ talvoudegezh ar gomz proletarian. Iskis e c'hell hañvalout bout hevelep deved evit ar mare-mañ dre m'eo en etrebrel e weler prederioù politikel o tont en-dro el lennegezh. Forzh penaos, an holl n'emaint ket a-du gant an diskleriadur-se ha reoù 'zo a sav a-enep dezhañ. Ul lod eus ar skrivagnerion a fell dezho emc'houleviañ gant ar Strollad Komunour (SK) evit lakaat splannoc'h « dispac'helled » o zestennoù.

Tennañ a reont splet eus o azez nevez a-hed ur pennad met peogwir int bet spisaet evel anpolitikel eo taget al lennegezh proletarian gant Kendalc'h Kharkov<sup>11</sup>. Adalek miz Du 1930, tachenn al lennegezh a gemer perzh en emgann politikel ha kospet eo al levr nann emouestlet. Divizet eo savadur skourr gall an AERA<sup>12</sup> evit mont a-enep ar gelaouenn *Monde* hag ar re a skriv enni. Klask a ra ar Strollad Komunour bodañ skrivagnerion, proletarianed rik ha strizh anezho, evit sevel kenskriverezh greanti ar « Rabcor »<sup>13</sup>. Met dre m'eo gorrek ar c'hehentiñ etre an URSS hag an AERA, ar gomunourion a grog gant al lennegezh vicherel p'emañ an URSS ouzh he gwelout evel aspadenn ur politikerezh kozh ha diamzeret. D'ar mare-se, ar « realouriezh sokialour » eo a zo diouzh ar c'hiz endeo.

An dornlevrioù skol ral a veneg al lennegezh-se hiziv n'en greont nemet evit he liammañ ouzh obererezhioù ar Strollad Komunour. Un doare gwall strizh d'he c'hompreñ eo. Ganet en arlez ar strolladoù politikel, atoret eo bet hi gant an SK dre ar « Rabkoroù » a-hed ur mare berr (1927-1932), goude bout gouzavet tagadennoù ponner a-walc'h eus e berzh. Ul lod eus he skrivagnerion a ya a-enep ar gomunourion. E 1935, e-keit m'eo sinet *Ar gontell er gouli* gant Albert AYGUESPARSE<sup>14</sup> hag ur strollad

11 Taget eo al lennegezh proletarian ganto dreist holl gant Kevredigezh ar Skrivagnerion hollrusian hag Aragon. Klask a ra ivez ar surrealourion o skarzhañ eus an dachenn lennegezh a-benn d'he flas. Paul Nizan hag a fell dezhañ kreñvaat enebiezh etre ar renkadoù, a rebec dezho bout re vadelezhus gant ar skrivagnerion vourc'hizel.

12 Kevredigezh Etrevroadel ar Skrivagnerion Dispac'hel, ur rann eus Unvaniezh ar Skrivagnerion Dispac'hel (savet e Moskva e 1927). E 1932 e teu war wel e Frañs, diwar vestroniezh ar Strollad Komunour Gall. Bodañ al luskadoù sevenadurel liammet ouzh mennozioù an SK eo he fal.

13 Berradur ar ger rusianek *rabotchi*, ur seurt kenskriverezh greantioù prientet a-benn enezañ ha broudañ ar mennozioù komunour.

14 Albert AYGUESPARSE (1900-1996), barzh ha skrivagner eus Brussel hag a zo emgavet gant ur berzh bihan. Kelenner da gentañ, emreiñ a ra d'al lennegezh gant *Ar gontell er gouli* peungetket (*Le couteau dans la plaie* e galleg). Goude bout savet ar gelaouenn Marginales ez a da ezel Akademiezh roueel ar galleg e Belgia. Degemer a ra prizioù ha gopradennoù.

## Al lennegezh proletarian, un arz a renkad

skrivagnerion en dro dezhañ, e vez reoù 'zo o krouiñ hag o stourm er « Poellgor etrevroadel a-enep ar gwaskadur enepmicherour e Rusia ».

Gant afer Viktor Serge<sup>15</sup> ha krouidigezh Strollad al Lun<sup>16</sup> e c'hoarvez an torr. Hiviziken e vo sellet evel un dra dic'hallus reiñ pouez d'al lennegezh proletarian en ur emezelañ en SK ha zoken evel un emzalc'h enepkomunour. Gwanaet endeo gant tarzhadegoù an SK ha Brezel Spagn (1936-1939), an Eil Brezel bed an hini eo a gaso kuit an taol arnod lennegezh-se.

N'eo ket embann da vare ar gouzalc'herezh eo a zo kudennek evit ar skrivagnerion vicherour (ar boniadoù paper eo a zo evezhiet gant an dalc'herion) met an darempredoù a vez ganto<sup>17</sup>. Goude 1932, frammadurioù an SS (Strollad Sokialour) hag an SK – a oa ar chañs nemeti da emvrudañ evit meur a vicherour – o deus o dilezet. Ar wask c'hweluniadel a ator hag a embann gant div gelaouenn : *Le rouge et le noir* ha *Cassandra*. Neoazh, peogwir ez eus ul lod vras eus an anvelourion o labourat en hini gentañ hag oc'h enebiñ ur beoc'hgarouriezh voniek ouzh an enebadeg armet e Spagn, ez a an darn vrasañ eus ar vicherourion da bellaat diouto. Diwar-benn *Cassandra*, kelaouenn ar c'hazetenner adunazi Paul Colin, an hevelep istor e vo hag an hini a-raok. Deuet ma oa da vout unan eus arouez ar gouzalc'herezh e-pad ar brezel, lazhet eo Colin gant ar Resistañs.

Goude ar brezel, ar re eus ar bed micherel dreist holl eo a zo tizhet gant ar moustrerezh. An damkanourion hag ar skridvarnourion vrudetañ, difennet gant o darempredoù dezho, ne vezont ket trubuilhet, pe nebeut, e-keit ma 'z a ar broleterion skrivagner deval, dre gaer pe dre heg. Peogwir eo bet kospet evit meur a genlabour kefredel, n'emañ ket a-du ken ar c'hreiz politikel ganto hag en e boull e kouezh keal ar strollad politikel-lennegezh. En abeg d'an holl zarvoudoù-se ne vo ket a badusted wir d'al luskad.

*Politikourion e kreiz an hent*

P'eo anavezet al liammoù etre al lennegezh proletarian gant ensavadur al lev

15 Viktor Serge (1890-1947), e anv gwir Viktor Lvovitch Kibaltchitch, zo ganet e Belgia gant kerent rusiat. Kospet goude bout kemeret perzh er bodad Bonnot eo kospet en-dro goude ma 'z eo bet tapet e-barzh un taol-savadeg. Anvelour ha toullbac'het, tridal a ra gant an dispac'h rusiat ha dont a-benn da vont da Rusia a-drugarez d'un eskemm prizonidi. Goude bout enskrivet er Strollad Komunour eo skarzhet kuit anezhañ ha harluet d'an Oural dre m'en deus droukvarnet oberennoù Stalin. D'e sikour e c'halv e vignoned skrivagnerion. Hag int d'ober o seizh gwellañ e-pad ar C'hendalc'h evit Difenn ar Sevenadur, pezh a zo degemeret fall gant ar gomunourion. N'o do ket o c'hoant met divac'het e vo Viktor Serge gant Stalin a-drugarez da hanterouriezh Romain Rolland.

16 « Strollad al Lun » (1936) a fell dezhañ bodañ skrivagnerion ha sevel ur manifesto evit diazezañ al lennegezh proletarian e Frañs. Gwelet eo gant ar gomunourion e-giz un dastaol ouzh ar C'hendalc'h evit Difenn ar Sevenadur. An taol amod-se a zelusk torridigezhioù hag unvaniezhioù, pezh a zizaoz an dachenn lennegezh.

17 Henri du Man, Robert Poulet ha Gabriel Figeyts da skouer. Politikour, kazetenner, lusker-skingomz e Radio Bruxelles. Kospet int en abeg d'o c'henlabour gant an enebour e-pad ar brezel.

## Al lennegezh proletarian, un arz a renkad

hag ar galloud politikel, disked eo ar re he doa gant an Iliz. E penn kentañ an ugentvet kantved eo prederiet galloud an Iliz da vont a-enep ar sokialouriezh<sup>18</sup>. Pa vefe kefredourion pe stourmerion Kevre al Labourerion Gristen<sup>19</sup>, den ebet ne fell dezhañ emliammañ ouzh an emsav lennegezh-se a zo tamallet da vout re dost d'ar gealiadurezh varksour. N'eo ket dedennet ar gristenion gant mennoz un « arz a renkad » met kentoc'h deuriet da vont pelloc'h gant deskadurezh ar bobl dre gelenn ar « blaz mat ». Neoazh, taol-esae ar sokialourion da grouiñ tiez ar bobl gant rannoù arzel a hop war ar gatoliked, hag ar goulennoù tro dro da werinekadur an arz a sach ur youl « adperc'hennañ » enno. Rebechet e vez d'ar sokialourion yevañ an arz dre stadelaat ha kreizennañ pa rankje an arz dont er bed dre intrudu brevez. Evit ar gristenion e vefe talvoudusoc'h klask adlakaat an arz war wel er c'helc'hiadur foran ha hiniennel – an ti, ar skol, ar gêr hag ar gêriadenn – gant ar pal hag ar c'hoant da bellaat an danvezelouriezh hollek diouzh an holl<sup>20</sup>. En abeg da se eo disfizius tre reiñ mui ouzh mui a bouez d'ar mirdi ; evito a het kentoc'h henchañ ar bobl dre an arz war-du lec'hioù santel evit o zостаat da Doue<sup>21</sup>.

Kavet e vez roud ar relijion el lennegezh vicherour. Gant Charles Plisnier<sup>22</sup> da skouer e kaver alies menegoù eus ar Basion gristen hag ar c'hoant dont e komunion gant bed ar micherour. Betek kengervel ar C'hrist ez a ar skrivagner dirak un hollad divroidi ha dic'hweleion<sup>23</sup> e-pad ur pezh-skingomz. Eno e leurenn ivez tudennoù merzherion<sup>24</sup> dispac'hel evit o lakaat da vont da vojennek ha da zont da vezañ sent lik hag arnevez. Gant Jean-Louis Vandermaesen, skrivagner ha maengleuzier eus Bro Liège, e vez roet anvioù biblek d'e dudennoù : « Jean », « Daniel », se evit korvoiñ ar bennskouer gristen. Josse Alzin<sup>25</sup>, ur skrivagner katolik belgian, a ijin ur sokialour yaouank o tizoleiñ e fazi. Evit ar jezuist Philippe de Soignie<sup>26</sup> a leurenn ur stourmerez komunour a ya da glask Doue goude bout kouezhet er c'hleñved hag er baourentez. Gwir eo ne vez ket liammet ar skrivagnerion gristen ouzh an emsavioù kevredadel kristen ha padal, ul lod eus al lennegezh vicherour a dalvez da groazhent hag a leurenn ur seurt kristeniezh kevredadel faltaziek hag awenet.

18 Da skouer, galv Firmin Van den Bosch evit lakaat ar skrivagnerion gatolik da skrivañ a-enep ar sokialouriezh pe krouidigezh ur briziadeg lennegezh en Ensavadur Katolik Pariz gant an hevelep pal.

19 Ganet war-lerc'h ar Brezel Bed kentañ diwar volentez an emsav flamank ha c'hweluniad kristen Flandrez.

20 Ar chaloni Théodule Bondroit, *Pour l'embellissement de notre vie*, Levrstal arzel ha relijiel, 1913.

21 Lenn Masoin Fritz, « L'art au foyer », in *Revue de l'éducation familiale*, n°10, Levraoueg vihan an desaverez tiegezh, 1913.

22 Komunour, kristen ha stourmer wallon, barzh ha arnodskridour, Charles Plisnier (1898-1952) zo mab ur vicherour hag ur c'hefdeurour pobl.

23 *Le Christ chez les chômeurs*, pezh skingomz savet e 1935, diaotret d'an delez, lakaet e levrgant Rue des usines 6-9, diskar-amzer 1981.

24 Charles Plisnier, *Faux Passeport*, Corréa, 1937.

25 Anv-pluenn Francis Delvaux, *La mine m'a tué*, Embannadurioù SPES, Pariz, 1936.

26 Anv-pluenn Philippe Mosane, *Mieke, La fiancée du Diable*, Desclée de Brouwer, Pariz, 1936.

Er bloavezhioù 30 e vez tuet ur moederezh yoc'hek e Belgia ha klasket ober gant kalvezderioù amprout gant ar Soviediz hag ar gomunourion alaman, da lavarout eo kalvezder ar « c'hanoù komzet » (ur stumm lennegezh dezho). *Déluge*, *Babel* ha *Périples* gant Charles Plisnier, da skouer, a vez savet diwar ar patrom-se evit ar c'hanaouegoù a-stroll dediet da vleiniaded dispac'h Rusia. Dre ma 'z eo gouest da c'hervel lusk ha spi an emsav kevredadel, e vez buhez ar stumm lennegezh ha barzhoniell-mañ evel komunion ar re baour a-gevret : kouerion dister, micherourion vak ha divak, dic'hweleion hogos o klask bara.

Ar moederezh sokialour a glask bout degemeret war ar maez, war douaroù ar gatoliked. Embannet ez eus un destenn gant Emile Masson e 1912 evit lakaat ar skrivagnerion hag ar stourmerion da gomz e brezhoneg a-benn magañ ar gouerion gant o mennozioù ha bout degemeret mat ganto. Betek henn e oa dalc'h het an dachenn gant ar veleion vrezhoneger, savet a-enep ar sokialouriezh. An tiadoù evito oa aon ganto rak bout dilemet digant o farkeier gant ar politikerezhioù nevez. Un destenn skrivet gant Elisé Reclus<sup>27</sup> zo embannet e gwenedeg hag e tregerieg evit respont dezho : *D'am breur al labourer* ha *De mem breur peizant*<sup>28</sup>. Un taol brud da reiñ aon dezho gant ar pezh a c'hallfe c'hoarvezout ma ne vefe ket degemeret ar sokialouriezh war ar maez.

#### Hiraezh wecball

Dre skodoù sevenadurel ha politikel eo sañset bout dispac'hel al lennegezh proletarian, pezh a fellfe d'he aozerion da nebeutañ. Neoazh e raio tro wenn. Gallus eo rakwelout he c'hwitadenn dre un darn eus he arouezioù.

Troet war-du an amzer dremenet, dre he furn da gentañ, an emvuhezziadur, n'eo ket diouzh he mare al lennegezh proletarian. Daoust m'eo birvidik deroù an ugentvet kantvet gant an aozadurioù adstummet dre an Dailoregezh, ar Fordegezh, an ardivinkelezh ha kelennadurezhioù all an araokaat, ne zeu ket a-benn ar micherour da adframañ e hevelebiezh. Ne skriv nemet diwar-benn e dremenet, e yaouankiz pa na vez ket diwar-benn hini e gerent pe e dud kozh. Dalc'h het o deus soñj eus an arouezioù istorel : ar stourm c'hweluniadel, an emsavadegoù bras a-enep ar batromed vourc'hiz, an arc'hantourion...

Ret eo adkavout Proudhon, digeriñ Sorel en-dro, lenn Edouard Bert, al lusker mennozioù proleter souezhus-mañ. Adkavout Guesde ar mareoù mat ivez, al lemmskrivagner Lafargue. Anaout Reclus, e breder sklaer, e skiant sur, e stil ken sklaer hag e breder, e angerzh evit an dispac'h ! Distreiñ da eien ar startijenn vicherel gant Babeuf,

27 Elisé Reclus (1830-1905) zo ur stourmer anvliour, mab ur pastor. Ganet e Gironde, tremen a ra e vuhez e Belgia e-lec'h m'en deus ur gador war an douaroniezh (Universited dieub Brussel). Reiñ a ra e zilez ha sevel Universited nevez Brussel gant kelennerion arall

28 Da lenn e *Hor Yezh*, n°238, Mezheven 2004, p. 47-62.

Blanqui, Varlin, emsavid Lyon, ar re eus faubourg Sant-Antoine hag ar Gumun. Distreiñ da eien al lennegezh proleter gallek gant Vallès, tennañ kuit eus an ankouazh ur Coeurderoy, hep disoñjal un Darien, ur Zo d'Axa, sevel istor ur Père Peinard, kompren un Albert Thierry<sup>29</sup>.

Un torr zo gant uhelennadoù an XIX<sup>vet</sup> kantvet e fin ar Brezel Bed kentañ. Ur renkad a labourerion damberzhiek nevez a zegouezhas e penn kentañ ar bloavezhioù ugent hag a lakaas da adprederiañ ar stourm micherel. Dilezet eo bet mare ar mennozioù dispac'hel gant ar c'hweluniaderezh hag evel an SK e krog da ziorren ur sell bureviadel ha kreizennet. Dre o fealded da brederourion frankizelour an XIX<sup>vet</sup> kantved, e seblant bout diamzeret ar skrivagnerion broletarian e-keñver buhez wir ar vicherion. D'ur mare m'eo dizenekaet ar micherour, hennezh an hini eo a chom stanket war un oadvezh aour pa c'halle kaout spi en ur stourm gwir dre an nerzh ha gant an holl. Evit an abegoù-se e c'hell bout gwelet al lennegezh proletarian evel enbarnevez.

En o skridoù endeo e veze roud eus hevelep diflachegezh ha selloù kozh. Bez' ez eus ur wir volontez evit al lennegezh testeni-mañ da chom hep testiñ diwar o mare. Gwir eo, ar mare-se en deus diforc'het diouzh e gealiadurezhioù bras ha dilezet e arouezioù kozh. En o mare, hini an dec'hadeg, ne chom ket mui eus o mojennoù ha pezh a roe nerzh dezho gwechall ne ra nemet magañ o hunvreoù bremañ. Gloazet betek en o sell taolet warnañ, ne chom nemet d'ar micherour eñvoriñ un amzer hag a zo marvet gant spi rezidigezh ar renkadoù. A-zivout ar c'hammamzeriad-mañ, Tristan Remy<sup>30</sup> a skriv : « O istorioù dezho o dalc'h muioc'h eget istor bras pezh he doa ar broleteriezh da sevel er bed »<sup>31</sup>. Komzet e vez eus an torr etre al lennegezh proletarian hag ar bed arnevez en *An emgannoù kollet* gant Louis Guilloux<sup>32</sup> (1960) hag *Henri Goutebel* gant Lucien Gachon<sup>33</sup> (1960), abegoù o droukverzh hervezo.

#### Chom hep mont da vourc'hiz

Bez' ez eus un abeg all, enien d'al lennegezh-mañ, o tislepegañ c'hwitadenn ar striv anezhi. Emziskouez dre un emskiant emanaout e kreiz ar renkad a venne al lennegezh-se. Diveizadus e seblant bout reiñ e vouezh da skrivagner ur renkad uhelañ. Ouzhpenn-se eo levezonet an « danvez pobl » savet gant ar vourc'hiz dre ur skeudenn

29 Serge Viktor, *Littérature & Révolution*, François Maspero, Pariz, 1976, p. 42 [brezhoneg ganimp].

30 Skrivagner ha kenlabourer er gelaouenn *Monde*.

31 Meneget gant Jean-Charles Amboise, « Entre littérature prolétarienne et réalisme socialiste : le parcours de Tristan Rémy » in *Sociétés & Représentations*, n°15, 2003. Klask a ra Tristan Remy dont e-touez e vare gant *La grande lutte* (1937) [brezhoneg ganimp].

32 Louis Guilloux (1899-1980), ganet ha marvet e Sant Brieg.

33 François Lucien Gachon (1894-1984), ganet ha marvet er Puy-de-Dôme. Deuet eus ur familh labourerion douar e krog gant ar vicher gelenner ha mont a ra da gelenn douaroniezh en Universited Clermont-Ferrand.

## Al lennegezh proletarian, un arz a renk

druzeus ha gwan, gant sell ar renkadoù uhelañ war an hini izelañ. A zo muioc'h : penaos e c'hallfe bout unvanadus an difrae bourc'hiz (ur seurt « diskenn d'ar bobl ») gant paliou ar broletereion p'emaint i o klask emuhelaat dre o sevenadur dezho ?

Peogwir eo hedreuz an harzoù etre renkadoù ar gevredigezh, da Henri Poulaille d'ober war-dro skrivagnerion ar bobl evit o diwall diouzh an trubarderezh kevredadel, o mirout da binvidikaat dre ar skritur. Diwar ar mennoz-mañ eo savet keal « nac'h ar bignadenn ». Se a dalvez e tle ar skrivagner nac'h bourc'hizekaat – ken ent danvezel, ken ent kefredel – a-benn lakaat war wel un arz a zo d'ar bobl hepken hag a c'hell pennañ ouzh al lennegezh Veur hep he fatromañ. Diwar netez, ar skrivagnerion bobl a ya an eil re a-enep ar re all, ul lod o c'hompren ar ger-se evel « ur bedadenn da chom kloz en hon renk »<sup>34</sup> hag o tiskuliañ pezh a zo mous-tuas en urzh-mañ.

Adalek ar mare ma krog ar micherour da skrivañ ha da gefredelaat, e krog ivez da bellaat diouzh e renk. Gant aon rak trubardiñ e klask digablusaat dre enkañ trubarderezh e genwazed evit tremen hebiou d'e drubarderezh dezhañ. Rouedadou flatrañ zo savet e mod-se ha breskaat a reont al luskad. Daoust d'an diarbennou kemeret, e chomo ar skritur un doare da bignat war-du bourc'hizelezh vihan ar gefredourion. Henri Poulaille eo an hini kentañ da vont e-maez e renk dre e obererezhioù bleinskrid. War ar 70% eus ar skrivagnerion a veze graet « proleterion » anezho hag a zeue eus ar renkadoù izelañ evit gwir, ne chom nemet 15% anezho goude ar brezel, ar peurrest deuet da vout mistri-skol, bureviaded pe amaezhiaded.

## Un hêrezh dispis

Abaoe hanter ha dibenn an XX<sup>vet</sup> kantved, cheñchet he deus ar gevredigezh he sell war an armerzh hag an aozadurioù foran. Kollet ez eus bet ul lod eus he arouezioù ha n'eus ken eus ar mengleuzier nag eus an houarnour. Gant staliadur al labour etreadegat er greantioù hag an enbroadeg nevez goude Brezel Aljeria eo lakaet en argoll an hevelebiezh vicherel. Tamm ha tamm eo bet diaozet he c'henstagded, lakaet pellder etre ar rummadoù hag ar mennozioù he doa douget ar broleteriezh. Emskiant renkadel, kengrediezh, spi an degemmadurioù politikel, sevenadurel, c'hweluniadel... ne gavont ket gwir heklek ken en hon c'hevredigezh hiziv. Adaozet don eo bet ar renk ad proleter goude an eil Brezel Bed, divodet hag adhentet war-du ar gennad tredeel. Diaesoc'h eo bremañ gwelout ha kompren gourzhtroadusted<sup>35</sup> al lennegezh proletarian e-keñver ar sevenadur he doa douget e penn kentañ an XX<sup>vet</sup> kantved.

Ha hiziv ? Daoust hag eñ zo ur pennhêr d'ar skritur proletarian ? Ar skridvarnour-mañ skridvarnour en deus lavaret e oa al lennegezh enbroerezh – al lennegezh

<sup>34</sup> Louis Guilloux, *Europe*, n°95, 15 Du, 1930, p. 411-413.

<sup>35</sup> Ger savet ganimp diwar Br. *gourzhtroadus* evit klotañ gant Gl. *subversion*.

## Al lennegezh proletarian, un arz a renk

« beur »<sup>36</sup> evel ma vez anvet – diskennat din d'ar spered proletarian. Dre m'eo ul lod anezho hep araezioù ha peogwir emaint kengreizet e « getoioù » annez izelfeurm, klask a reer o lakaat e-skoaz gant buhez ar broletereion evel ma vent int e deroù an XX<sup>vet</sup> kantved. Evidon me, faziek eo ar savboent-se dre ma n'eus ket eus ur « renk » enbroet hag ouzhpenn n'emañ ket al lennegezh « beur » o vogañ santadoù ur renk ad dibar. Er c'hontrol, prederiañ a ra war liessonegezh he mouezhioù, dizunvaniezh he gwizioù ha doareoù bevañ meur a hevelebiezh war un dro.

Proleterion ar c'hantved diwezhañ oa ganto dezrevellou staget kreñv ouzh o zachennoù en doare ma veze diaes kompren a-wechoù evit ul lenner pell diouto (trefoedachoù, geriaoueg hag all). Un abeg e-touez ar re all a zispleg perak ne gomzer ket ken anezho ha perak ne vez kavet o anvioù nemet p'o c'hasker el « lennegezh rannvroel ». Dedennet gant testennoù diwar-benn e vuhez vicherel, ar proleter a glask diskouez d'e vreur pell dioutañ penaos e vez eñ ha dre lennadennou an testennoù arall e test penaos e vez graet en tu all d'ar vro. Lenn a c'haller an testennoù proletarian evel un eskemm lizhiri etrezo, o klask diskouez etrevoadelezh o buhezioù daoust da zibarded o zachennoù. N'eo ket ar mondan eus Pariz o klask sevel breviaal ar paour met labourer dister an Hainault o klask gerioù da lakaat war e vuhez dezhañ. El lennegezh vicherel evel el lennegezh rannvroel, klasket e vez komz eus e dachenn o tresañ trolinennaou ur strollad tud hag o sevel ur glad a-gevret.

Al lennegezh proletarian eviti he deus bet skiant a-walc'h da sevel un diviz gwir diwar-benn modelezhoù he c'hrouidigezh. O tremen dre genlabour he skrivagnerion ha liested he mediaou (kazetenn, kelaouenn, lev, skingomz...), krouet o deus he luskadoù ur c'hendiviz gwir ha gwevn. Kelennadurezh ar « chom hep bourc'hizekaat », daoust dezhi bout gargamm, eo bet an urzh pennañ. Mouzhet ouzh ensavadur al lennegezh Veur, ne fell d'ar skrivagner-proleter nemet labourat da zazoned e renk ha sevel un « arz tiegezh » hep marmouzañ reoladoù al lennegezh vourc'hiz na mont a-gildorn dezhi. Daoust ma oa gwallreuzus an amveziadur politikel hag armerzhel, ledet eo al luskad a-drugarez d'ur c'hevredig niverus daoust dezhañ bout paour hag alies a-walc'h damisleek. Daoust da ziaesterioù an Istor, an degemmadurioù kevredigezhel eo o deus he skarzhet kuit hag a ro da soñjal ne zegemerimp ket ken ul lennegezh renkadel ken.

Hiziv, daoust d'an holl bout leekaet, e lavareer emañ en arvar al lennegezh-veur pe, da nebeutañ, e tiwask un enkadenn. Hi kennebeut n'eo ket aet hebiou da herrekadur kalvezel ha krouidigezhel an XX<sup>vet</sup> kantved : e koulz ar gourc'hennaskañ, klask a ra he danvez en ur c'hendiviz gant an hollelezh, gant an arvar mont da goll.

Didalvez eo marteze dispakañ al lennegezh-mañ, tonket d'an aner, e kement ma n'he diwallo ket diouzh an ankounac'h. Diwel e chomo, en Istorioù a l lennezhioù

<sup>36</sup> Ger arveret gant Céline Pobel, « Nouvel Age Littéraire ou quand le peuple persiste et signe "beur" », in *Autour d'Henry Poulaille et de la littérature prolétarienne*, Université de Provence, dastumad Textuelles littéraires, Aix-en-Provence, 2003.

kement ha divezoud el labourioù akademiek. Koulskoude he doa douget skloufonioù divent. Dalc'homp soñj da nebeutañ eus an herder uhelañ he doa maget : un arz emreoliet diwar skouer arzoù korfoù micher gwechall. Hiziv e tiskouez bout un taol-arnod c'hwitet m'he deus al lennegezh Veur manket da dapout krog en he darvez azvevezif.

Manon Le Gourrierec

**Gerva brezhoneg-galleg :**

(En urzh al lizherenneg eo aozet. Ur steredenn zo bet lakaet da verkañ ar gerioù benel)

Amaezhiad : *fonctionnaire*  
 Amplegad : *condition*  
 Amveziadur : *contexte*  
 Anveliour : *anarchiste*  
 Araez : *moyen*  
 Arc'hañ : *revendiquer*  
 Arlez : *marge*  
 Aspadenn\* : *survivance, reste, vestige*  
 Atoriñ : *recupérer*  
 Boneg\* : *code*  
 Damberzhiek : *semi-qualifié*  
 Danvezelouriezh\* : *materialisme*  
 Derc'hennadur : *représentation*  
 Deved\* : *decret*  
 Diarbenn : *mesure*  
 Dic'hweleg : *chômeur*  
 Dilested\* : *authenticité*  
 Dizenekaat : *déshumaniser*  
 Emc'houleviañ : *se mettre sous tutelle*  
 Emzerc'hennadur : *autoreprésentation*  
 Enkañ : *traquer*  
 Enien : *intransèque, la nature d'une chose*  
 Etredegat : *intérimaire*  
 Fallvotaouad : « *den en deus botoù fall* »  
 Gennad tredeel : *secteur tertiaire*  
 Gourc'hennaskañ : *hyperconnexion*  
 Gouzalc'herezh : *occupation*

Gronnañ : *assiéger, investir*  
 Gwask\* c'hweluniadel : *presse syndicale*  
 Gwerinekadur : *démocratisation*  
 Hedreuz : *perméable*  
 Herder : *audace*  
 Isleek : *illétre*  
 Keneñ : *plaider*  
 Kenwaz : *collogue*  
 Leekaat : *alphabétiser*  
 Moederezh : *propagande*  
 Perzhe : *qualifié*  
 Reizhwiriegezh\* : *légitimité*  
 Rezidigezh\* : *émancipation*  
 Skod : *enjeu*

## Prederouriezh

## Lizhiri Karl Marx da Vera Zasoulitch

## Un eskemm hag ur gudenn

E-doug miz C'hwevrer 1881, ar prederour Karl Marx a zegemeras ul lizher eus Rusia kaset gant ur stourmerz anveliour rusian : Vera Zasoulitch. Vera Ivanovna Zasoulitch (Вера Ивановна Засулич) zo bet ganet e 1849 en ur familh eus an noblañs rusian. E pad he studioù e Sankt Peterbourg he deus bet tro da gejañ gant metoù dispac'hour hag anveliour rusian. En abeg d'he c'henskriverezh gant an dispac'her Sergei Netchaïev (Сергей Геннадиевич Нечаев) e voe toullbac'het e Kastell Pêr-ha-Paol e 1869, met dieubet e 1871. Ur wech dieub ez emouestlas en ur strollad anvet « Emsaverion ar Su » a aoze gwalldaolioù a-enep ar renad tsarour. Ur wech distroet e Sankt Peterbourg e klaskas lazhañ ar jeneral Trepov<sup>1</sup> dre denañ warnañ gant ur *British Bulldog revolver*. Trepov oa brudet e Rusia evit e verzh e mougerezh an emsavadegoù poloniat. Goude bezañ harzet gant ar polis rusian e tremenas dirak al lez varn he didamallas, moarvat a-drugarez da adreizhadennoù lezennel an tzar Alesandr II : emzifenn a c'hellas gant ur vreaeter a-zoare a zisklerias d'an holl e rankfed barn Trepov kentoc'h evit Zasoulitch<sup>2</sup>.

Da heul he frosez e kuitas ar vro evit mont da vevañ en harlu e Bri Suis. Du-se e kejas gant sokialourion pe dispac'herion all hag e kemeras perzh en aozadurioù evel « Douar ha Frankiz », a-raok distreiñ da Rusia evit krouiñ ar gevrazhe « Rannadur Du » adalek 1879 gant tud evel Plekhanov<sup>3</sup>, Akselrod<sup>4</sup>, Lev Deutsch<sup>5</sup>, Osip Aptekman<sup>6</sup>

1 Barbara A. Engel ha Clifford N. Rosenthal, *Five Sisters: Women Against the Tsar*, Northern Illinois University Press, 1975, p. 61.

2 Adam B. Ulman, *In the Name of the People: Prophets and Conspirators in Prerevolutionary Russia*, Viking Adult, 1977.

3 Georgi Valentinovitch Plekhanov (Георгий Валентинович Плеханов), ganet d'an 11 Kerzu 1856 – marvet d'an 30 mai 1918, oa un dispac'her ha damkaner marksour rusian a grouas al luskad kevredadel-demokratel e Rusia hag a vrudas mennozioù ha raktresoù ar varksouriezh er vro.

4 Pavel Borisovitch Akselrod (Павел Борисович Аксельрод), ganet d'an 25 Eost 1850 – marvet d'ar 16 Ebrel 1928) oa un dispac'hour marksour rusian. Krouet en deus al luskad « Dieubidigezh an douar ».

5 Lev Grigorievitch Deutsch, pe Leo Deutsch (Лев Григорьевич Дейч), ganet d'an 25 Gwengolo 1855 ha marvet d'ar 5 Eost 1941, oa un dispac'her rusian ezel ha krouer eus al luskad « Rannadur Du » (*Тcherny Peredel, Чёрный передел*) ha diwezhatoc'h ur stourmer er Strollad Kevredadel-Demokratel eus Rusia.

6 Osip Vasiljevitch Aptekman (Осип Васильевич Антекман), ganet d'an 30 Meurzh 1849 ha marvet d'an 8 Gouere 1926, oa un dispac'her rusian.

hag Elizaveta Kovalskaia<sup>7</sup>. Ha goude bezañ bet o skrivañ da Karl Marx a-zivout istor armerzhel Rusia e troas *Manifesto ar Strollad Komunour* e rusianeg e 1882. Da heul an eskemm a studiimp ez emouestlas er Strollad Komunour adalek 1883.

En ul lizher eus ar miz C'hwevrer a venegemp e deroù hon prepoz, e voe savet goulennoù digant Karl Marx a-zivout dazoned ar gumuniezh gounidel rusian ha planedenn an kez kumuniezh en Istor. N'eo ket munut na dister ar gudenn. Karl Marx a gomz hag a breder adalek kevredigezhioù greantel – pe o c'hreantelaat – er C'hornog. Er c'hevredigezhioù-se e tiorro tamm ha tamm ur patrom armerzhel e bed al labour, diazezet war ar gounezerezh hag ar greanterezh. Keñverioù diseurt etre renkadoù ken liesseurt a gaver e stadoù Europa ar C'hornog. Met diseurtoc'h c'hoazh eo pa geñverier gant Europa ar Reter ha dreist holl gant Rusia an Tzared. En holl vroioù-se, abaoe tarzhadenn an Dispac'h C'hall ha skignadenn mennozioù ararkelour gant armeoù Napoléon, ez a war gemmañ an darempredoù politikel hag armerzhel er stadoù a venegemp. Met dre vras e chom pep stad european ur stad a uhelidi, na pa ve an Trede Republik e Bro C'hall, ar Rouantelezh Unanet pe an Alamagn wilhelmian. Karl Marx, en e zamkaniezh, a chom stag ouzh ur bleustregezh : ne vern ar stern stadel, pezh a gont eo perc'henedigezh an douar.

Endalc'het eo ar gudenn-mañ en un nebeud darvoudoù nevez c'hoarvezet er C'hornog : torridigezh ar sklaverezh e Stadoù Unanet Amerika ha diskar ar servelezh e Rusia. Karl Marx, en e lizhiri hag en e destennoù, a gompren mat e vo displep pep diskar pe pep torridigezh eus ar stad suj ma ne vez ket erlec'hiet gant ur gwir perc'hennadur eus an araezioù kenderc'hañ hag eus an douaroù gounideg. Er c'hontrol, ar vrizhfrankiz profet d'ar sklaved ha d'ar served a gasfe – hag a gasas – ar poblañsoù nevez dieubet etre daouarn ar c'hevala, o vezañ arveret e labouradegoù ha plantadegoù ma voent fallc'hopret<sup>8</sup>. Ne raent nemet tremen eus ur sklaverezh tadour hag aotrouniek er ster kreñv, da sujerezh ar goprezezh<sup>9</sup>.

An argerzh-se a voe kavet hag elfennet gant Marx en armerzh kement ha gant Tolstoi er vuhez politikel rusian a gavas heklevioù dramaek – ma n'eo ket un diougan kriz – e darvoudoù evel torridigezh ar sklaverezh er Stadoù Unanet a roas ar frankiz d'ar sklaved met na roas ket dezho an araezioù rekis evit tizhout ul live buhez dereat. An degouezh-se a redias ar Stad kevredadel da lezel stadoù ar Su da staliañ ar gouennzisarannerezh. En hevelep doare eo diskaret an dalc'herezh aotrouniek e Rusia

7 Elizaveta Kovalskaya, (Елизавета Николаевна Ковальская), ganet dindan an anv Élisabeth Soltsev d'ar 17 Even 1849 (deizad amsklaer ha diasur) ha marvet e 1943, oa un anveliour dispac'her rusian.

8 Jacques Sapir, « Les origines de la Russie moderne », load *RussEurope*, 15 Even 2014, <http://russeurope.hypotheses.org/2388>.

9 Catherine de Montlibert, *L'émancipation des serfs de Russie*, Bruxelles, Bebooks, 2014, p. 40.

a vouge personelezh keodedel ar serv. Ar serv dieubet a zegemer gwirioù keodedel ha personel evit mouezhiañ e kuzulioù kumuniezhel, rannvroel hag all. Ar gumuniezh (мир, *mir*) zo kemmet, adreizhet hag anavezet evel ur voudelezh stadel. Met dilez an douaroù kumuniezhel hag aotrouniet ne voe ket heuliet gant staliadur gwir araezioù kenderc'hañ : ar frankiz politikel ne oa soliet war emtrenezh armerzhel ebet. Skouerioù all hor befe da ginnig ha da elfennañ evel disoc'h Brezelioù ar Boers e Su Afrika hag e ganedigezh ar gevredigezh diazezet war an Apartheid e-doug an XX<sup>vet</sup> kantved<sup>10</sup>.

Deur Marx zo desachet ivez gant stumm ar gumuniezh kent o vezañ hini ar gumuniezh c'hounideg rusian. Pa lennimp ar ger « kumuniezh » e rankomp gouzout e tal ar ger-se d'ar rusianeg *mir* a dalvez « peoc'h », « bed » ha « kumuniezh » en hevelep koulz. Unvaniezh ar steroù-se en ur ger pe un heuliad gerioù heñvelson ha heñvelskrid a c'hell bezañ displeget gant un orin voutin a gaver moarvat en ur gwrienn eus ar yezhoù iranien evel ar skiteg, \**mihr*, a zeufe eus an henberseg \**mithra* skeudennet gant an avesteg *mitra*<sup>11</sup>. Ar gerdarzh-mañ a dalvez e sanskriteg vedeg « keneilded / keneil », « emglev » pe « unvan ». E perseg, *mitra* a dalvez « kevrat ». An holl c'herioù pe gwrizennoù-se a zeu moarvat eus ur wrizienn indezeuropek koshoc'h, \**mi-*, a dalvez « stagañ » hag hon laka da gompren \**mitra-* evel ul « liamm » pe ul « lien ».

Evit distreiñ da Rusia an XIX<sup>vet</sup> kantved, ar mir zo un devoud gwirel, douarel ha kemedel an endalc'h ur gumuniezh labourerion – labourerion douar evit an aliesañ – a ed, a gutuilh hag a eost douaroù strollet perc'hennet gant an aotrou. Evit ar Rusianed, stumm prim ha naturel aozadur an dud a labour an douar eo. E troioù lavar ar gouerion e c'haller klevout : « An douar zo d'ar gumuniezh [*mir*] » (*zemlja mirskaja*)<sup>12</sup>. Amkan pennañ ar mir zo disparti reoliek an douaroù etre an tiegezhioù graet hervez an nerzhioù labour e pep tiegezh.

Ur stumm kent eo, chomet pell diouzh treuzstummadurioù an Istor kornogour, pell diouzh an argerzh brastreset e *Manifesto ar Strollad Komunour*, un argerzh a ya eus ar renad gladdalc'hel betek trec'h ar broleterion ha donedigezh o ren<sup>13</sup>. El lizher eus troet e kavimp ur c'hemmadur eus e zamkaniezh diwar-benn stadoù ar c'hevala. Muioc'h eget un deur, un awen a gav Marx er c'humuniezhioù-se, un awen evit reiñ danvez d'e brederiadenn a-zivout anien ar c'hevala, o vezañ reverzhi « dizehan ar

10 Bernard Lugan, *La Guerre des Boers : 1899-1902*, Paris, Perrin, 1998, p. 340 ha dreist holl ar c'hlozadur a-zivout krouidigezh ar *Colour bar*.

11 Barbara Cassin, *Vocabulaire Européen des philosophies : dictionnaire des intraduisibles*, Paris, Le Seuil/Le Robert, 2004, pennad « *Mir* » gant Charles Malamoud, p. 803.

12 Moshé Lewin, *La Formation du système soviétique*, Paris, Gallimard, 1997 p. 113.

13 Karl Marx ha Friedrich Engels, *Manifesto ar Strollad Komunour*, Plovelh, Preder, 1968, p. 64.

c'henderc'hañ, diskogellañ diastal holl ensavioù ar gevredigezh, an disurentez hag ar birvilh peurzalc'hus, setu pezh a laka kemm etre an oadvezh bourc'hiz hag an holl re gent »<sup>14</sup>. Er gumuniezh rusian e kav dres ur skouer eus un elfenn gentidik bet dalc'het pell diouzh rouestl ha kemmadurioù ar c'hevala a gas « da get [...] kement a zo start ha stabil, [...] sakr ha rediet »<sup>15</sup>, hag e venn kavout e glanned an elfenn gentidik-se pezh a zo moarvat arnevesañ promesa an amzerioù dazont, e venn kavout an arnevesañ « er c'hentidikañ »<sup>16</sup>.

Ur gudenn gempred kenan eo evit Marx ha Zasoulitch : peseurt tuadur a vo roet d'ar berc'hentiezh ha d'ar geodedouriezh nevez ? Evel m'hon eus lavaret abretoc'h, skouerioù eus pleustregezh ar gudenn douarel ha keodedel a gaver gant diskar ar servelezh e Rusia e 1861 ha dibenn ar sklavezh er Stadoù Unanet er bloavezhioù 1860. Dirak arvar ganedigezh un dalc'herezh nevez evit ar geodedourion bet served pe sklaved, Marx a ziskouez talvoudegezh stummoù kentidik o lakaat e pleustr ur gouniderez hag ur gwarez pleustrek a deiz da zeiz.

Respont Marx a ziskouez dimp ned eus ket gwashoc'h adreizhadenn eget un hanter adreizhadenn a brof gwirioù politikel met o c'houlloñ stummoù kent a brofe danvezioù ha gwarezioù pleustrek ha dre se a aesae dalc'herezh ar c'hevala. An hevelep douetañs en devoa bet a-zivout meizad hag arver « gwirioù Mab Den » o kavout e ve gwelloc'h staliañ un doare *Habeas Corpus* pleustrekoc'h hag efedusoc'h evit difenn buhez an denion<sup>17</sup>.

Met deur Marx evit ar stummoù kent ha pleustrek zo deur un dispac'her a venn arver splot ar stummoù kent-se e kemmadur an darempredoù politikel. Amañ e c'hellomp kavout ur primveizad eus kealioù politikel a sturias adreizhadennoù a bouez en istor kevredigezhioù gempred. Da skouer, e kevredigezh japanat an Oadvezh Meiji – a dizhas ur galloud dibar en Azia – ez eus bet arveret ha dalc'het stummoù darempredoù politikel ha kevredigezhel hengounel, kenoazadurioù henvoazel en domani armerzhel<sup>18</sup>. Hiziv c'hoazh e kaver patromoù a seurt-se a c'hallfe displegañ disoc'h efedus ha splotus en armerzh hag er greanterezh rusian.

14 Karl Marx ha Friedrich Engels, *op. cit.*, p. 29.

15 *Idem*.

16 Döden dispellet mat tre e levr Jean-Claude Michéa, *Les Mystères de la gauche – De l'idéal des Lumières au triomphe du capitalisme absolu*, Paris, Flammarion, 2014, dreist holl er bajenn 25.

17 Jean-Claude Michéa, *op. cit.*, pennad [K] « Marx distinguait deux types de réactions contre la Révolution française et les Lumières », p. 83.

18 Cf. J. Hirschmeier, *The origins of Entrepreneurship in Meiji Japan*, Harvard University Press, Cambridge, Mass., 1964 ; J.W. Bennet et I. Ishino, *Paternalism in the Japanese Economy : Anthropological Studies of Oyabun-Kobun Patterns*, University of Minnesota Press, Minneapolis, Minn., 1963.

Ar c'heñver arvez/kentidik a hañval dimp bremañ bezañ re brim ha re eeun evit bezañ spletus hag efedus en elfennadenn kudennoù istorel ha politikel a bouez<sup>19</sup>. Evel ma primvez Karl Marx, berzh pep adreizhadenn pe kemmadur politikel hag armerzhel a dremen dre eilsamm stummoù kentidik pleustrek ha n'eo ket dre amprest stummoù kevredigezhioù brudet evit bezañ arvez. An destenn en he fezh zo ur goaperezh ouzh « karerion rusian ar reizhiad kevalaour ». Kentelius e chom an destenn-se evit ar brederouriezh politikel en un oadvezh enkadennel, evit ar stadoù european kendrec'het gant ar frankizouriezh frank-eskemmer kement hag evit annezidi douaroù Breizh, bet kemmet ha treuzstummet gant adreizhadennoù ar *grand remembrement* ha dilez ar c'hleuzioù ha henharzoù a gonte dimp ster an douar.

Pevar brouilhed respont a gaver e dielloù Karl Marx<sup>20</sup>. Pep hini a heuilh dre vras an hevelep stern hag o lenn an testennoù-se unan hag unan ez emadkaver alies tre dirak frazennoù stambouc'hus ha pennadoù a-bezh adskrivet penn da benn meur a wech. Setu perak hon eus divizet kinnig deoc'h div diouzh ar pemp destenn a ra danvez e respont da Vera Zasoulitch : an hirañ hag ar c'hlokañ respont hag ar respont peurglozet ha kaset d'ar geodedourez Zasoulitch. Un deiz bennak e rankimp moarvat kinnig un embannadur hollek eus ar brouilhedoù a-benn reiñ d'an imbouerc'herion ha d'an istorourion ur gwir benveg evit komprenidigezh ar breder marksour.

An droidigezh-mañ zo dediet da Vincent Cariou ha Hoel Mahe, e koun an curvezhioù ha nozvezhioù tremenet da brederiañ a-zivout dazoned an douar.

Gwendal Piégais

### Brouilhed Karl Marx eus e lizher da Vera Zassoulitch

O plediñ gant geneliezh ar c'henderc'hañ kevalaour, e'm eus lavaret ez eo e sekred ez eus erfont « an disparti boniek etre ar c'henderc'her hag an araezioù kenderc'hañ » (p. 315, kolonenn I, emb. gallek *Ar C'hevala<sup>21</sup>*) ha « diazez an emdroadur-mañ en e bezh eo diberc'hennadur ar c'houezerion. N'eo bet sevenet c'hoazh en un doare ken gwirziadek nemet e Bro Saoz... Met an holl vroioù en Europa ar c'hornog a erol an hevelep luskad. » (l.c.c.II). Krennet strizh e'm eus enta « tonkadur istorel » al luskad-se da vroioù Europa ar c'hornog. Ha perak ? Keñveriiñ, mar plij, ar pennad XXXII ma lenner :

<sup>19</sup> Jacques Sapir, *op. cit.*

<sup>20</sup> Embannet evit ar wech kentañ en *Archives Marx et Engels*, levrenn I, e 1924.

<sup>21</sup> E darn vrasañ an destenn, Marx a zave da embannadurioù gallek e oberenn.

Al luskad raskiñ a dreuzstumm an araezioù kenderc'hañ hiniennel ha dispak en araezioù kenderc'hañ tolpet ez-kevredadel, oc'h ober eus perc'hentiezh korr ar brasniver perc'hentiezh ramzel ur bihannver, an diberc'hennadur poanius-mañ, diberc'hennadur spouronus ar bobl labourer, setu orinoù, setu geneliezh ar c'hevala... Ar berc'hentiezh prevez soliet war al labour personel... a vo distroadet gant ar berc'hentiezh prevez kevalaour soliet war c'houezerezh labour an arall, war ar c'hopradelezh (p. 340, CII).

Neuze, e dibenn dezrann, ez eus un treuzstummadur eus stumm ar berc'hentiezh prevez. An douar etre daouarn ar gouerion rusian ne voe nepred o ferc'hentiezh prevez, penaos e c'hallfe emzesezañ an diorroadur-mañ enta ?

Diouzh ar savboent istorel, setu an arguzenn sirius nemeti breutaet e gounid dispennadur marvus kumun ar gouerion rusian :

Dre zistreiñ abred tre e kaver, e pep lec'h en Europa ar c'hornog, ur berc'hentiezh voutin a rizh damhenstuzel : e pep lec'h he deus steuziet gant an araoakaat kevredigezhel. Perak e rankfe diankañ diouzh an tonkad-se e Rusia hepken ?

Respont a ran : Rak e Rusia, a-drugarez d'ur c'henelfennadur a amveziadoù unel, ar gumun vaeziat, staliet c'hoazh war ur skeuliad riez, a c'hell emdennañ a-nebeudigoù diouzh he ferzhioù kent ha diorren war-eeun evel un elfenn genderc'hañ strollet war ur skeuliad riez. Dres, a-drugarez da gempredelzh ar c'henderc'had kevalaour eo e c'hell kendoareañ an holl akuidoù yaus anezhañ, ha hep tremen dre e zarvoudoù spontus, euzhik. Rusia ne vet ket dizarempred gant ar bed arvez ; n'eo ket kennebeut preizh un alouber estren par da Indez ar Reter.

Karerion rusian ar reizhiad kevalaour, mar nac'hent gallusted damkanel hevelep emdroadur, e savfen dezho ar goulenn : a-benn korvoiñ an ardivinkoù, al listri dre aezhenn, an houarnhentoù, h. a., ha rediet eo bet Rusia, e doare ar C'hornog, da dremen dre un amzeriad hir a c'horadur eus ar greanterezh ardivinkel ? Ra zispiegint din c'hoazh penaos o deus graet evit ebarzhiñ en o bro en ur serr lagad ar wikefre eskemm a-bezh (bankoù, kevredadoù kred, h. a.), a goustas kantvedoù d'ar c'hornog o danzeadur ?

Da vare ar frankaerezh, mar bije bet lakaet da gentañ penn ar c'humunioù maezel en amveziadoù berzh reizh ha da heul, mar bije bet arveret an holl zispignoù-mañ, reoù an dlead foran paet a-drugarez da vizoù ha da zispignoù ar gouerion, gant ar sammadoù ramzel all pourvezet dre hanterouriezh ar Stad (ha c'hoazh dre vizoù ha da zispignoù ar gouerion) da « golonennoù nevez ar gevredigezh », treuzstummet e kevalourion – mar bije bet arveret an holl zispignoù-se evit diorroadur a-c'houdevezh ar

gumun vaeziat, den ebet enta ne hunvreje hiziv e « tonkadur istorel » peurzistrujidgezh ar gumun : an holl dud a anavezje amañ elfenn advedadur ar gevredigezh rusian hag un elfenn a zreistelezh e-keñver ar broioù bazhyevet gant ar renad kevalaour.

Un amveziad all zo lañsus d'ar gumun rusian (dre hent an diorren) : ouzhpenn bezañ kempred gant ar c'henderc'hañ kevalael, treuzvevet he deus ivez d'ar mare ma hañvale bezañ divoulc'h c'hoazh ar reizhiad kevredigezhel-se, he c'havout a ra er c'hontrol en Europa ar c'hornôg kement hag er Stadoù-Unanet, o stourm gant ar skiant ha gant ar gwaskoù poblek, ha zoken gant an nerzhioù kenderc'hañ a engehent. He c'havout a ra – en ur ger – en un enkadenn na echuo nemet dre he rask, dre un distro eus ar c'hevredigezhioù arnevez a rizh « henaek » eus ar berc'hentiezh strollel, ur stumm e-lec'h – evel m'en lavar un aozour amerikan, hep diskred warnañ bezañ un dispac'her, harpet en e labourioù gant gouarnamant Washington, – ma teuy da vezañ « ar reizhiad nevez » a sko ar gevredigezh arnevez etrezek enni, « azginivelezh (a revival) », en ur stumm uheloc'h (*in a superior form*), ur rizh kevredigezhel henaek ». Arabat enta bezañ re ankeniet gant ar ger « henaek ».

Ret e ve neuze anavezout d'an nebeutañ an darvezadurezh anezhi avat. Ne ouzomp mann ebet diwar-benn kement se.

Istor diskar ar c'humuniezhoù kent (ur fazi a rajer o lakaat an holl anezho war an hevelep linenn : evel er stummadurioù douarouriezhel ez eus er stummadurioù istorel un heuliad a rizhoù kent, eil, trede, h. a.) zo c'hoazh da skrivañ. Betek henn n'eus bet darbet nemet brasskeudennoù munut. Met a-walc'h eo aet war-raok an erc'hwilerezhezh dimp da ziogeliñ :

1. e oa kreñvoc'h birvidigezh ar c'humuniezhoù kent en un doare dibare-keñver hini ar c'hevredigezhioù semit, gresian, roman, h. a., seul gent a se evit hini ar c'hevredigezhioù kevalaour arnevez ;

2. e tever abegoù o diskar diouzh stlennadoù armerzhel a vire outo da drehontañ ul live bennak a ziorroadur, diouzh metecier istorel hep heñveliezh ebet gant metoù istorel ar gumun rusian a hiziv.

O lenn istorioù ar c'humuniezhoù kent, skrivet gant bourc'hizion, e ranker bezañ war evezh. Ne gilont ket zoken dirak falzadurioù. Sir Henry Maine, da skouer, a voe ur c'henlabourer bouilh eus al levrierezh saoz en e oberenn distruj feuls eus ar

c'humuniezhoù indian, a ziogel gant pilpouzerzh e c'hwitas an holl uhelstrivoù a-berzh al leviadurezh a-benn harpañ ar c'humuniezhoù-se a-enep nerzh trumm al lezennoù armerzhel<sup>22</sup>.

En un doare pe un all eo marvet ar gumun-se e kreiz ar brezelioù difin, estren ha diabarzh ; moarvat e varvas dre ar feulster. Ne oa ket mui eus ar gumun a rizh henaek pa voe aloubet Italia, Spagn ha Galia, h. a. gant ar C'hermaned. Koulskoude, he birvidigezh naturel zo prouet gant daou zevoud. Skouerioù a-strew zo anezhi, o deus treuzvevet da holl zarvoudoù ar Grennamzer hag o deus dalc'het betek hiziv, da skouer e 'm bro c'henidik, pastell vro Trier. Met ar pep pouezusañ eo ez eo deuet a-benn da engwaskañ he ferzhioù hi war ar gumuniezhe deus he erlec'hiet – kumuniezhe ma 'z eo deuet an douar aradus da vezañ perc'hentiezh prevez, p'eo manet boutin ar c'hoadeier, an arc'hmel, an douaroù a dirienn, h. a. – en un doare ken mat ma c'hellas Mauer, dre zifraostañ ar gumuniezhe eilstummet, adsevel ar pimpatrom henaek anezhi. A-drugarez d'ar perzhioù dezverkus amprestet diganti, ar gumuniezhe nevez, ebarzhet er broioù aloubet gant ar C'hermaned, a zeue da vezañ an oaled nemeti a frankiz hag a vuhez poblek e-pad ar Grennamzer a-bezh. Da heul mare Tacitus, ma ne ouezomp netra a-zivout buhez ar gumuniezhe nag a-zivout mod ha mare he diankadenn, ez anavezomp da nebeutañ, an ampoent loc'hañ anezhi, a-drugarez da zezrevell Julius Caesar. En e amzer, an douar oa lodennet endeo bep bloaz, padal etre gentes ha tribus ar c'hengevredadoù german, ha ket c'hoazh etre holl izili hiniennel ur gumun. Neuze, ar gumun vaezat e Germania a zeu eus ur rizh henaekoc'h. Eno e voe disoc'h un diorroadur trumm e-lec'h bezañ enporzhiet penn da benn eus Azia. Du-se – en Indez ar Reter – en he c'hejomp ivez ha c'hoazh dindan stumm diwezhañ termen ha mare ar stummadur henaek.

A-benn barnañ planedennoù gallus ar « gumuniezhoù mazel » diouzh ur savboent damkanel, da lavarout eo da amplegiñ bepred amveziadoù buhezal reizh, e rankan bremañ merkañ perzhioù heverk a ziforc'h ar « gumuniezhe mazel » diouzh patromoù kentidikoc'h.

Ha da gentañ penn, ar c'humuniezhoù kentidik zo soliet an holl anezho war gerentiezh naturel he izilli ; dre derrañ al liamm kreñv met strizh-se, ar gumun c'hounezel zo gouestoc'h d'emledañ ha da ziouzañ darempred gant an estrenion.

Da heul, enni, an ti hag hag e glokadur, al lez, zo perc'hentiezh prevez an tiekaer, tra ma voe eus an ti boutin unan eus diazezoù danvezel ar c'humuniezhoù kent, pell a-raok degasadur ar gounezerezh.

Erziwezh, daoust ma chom an douar aradus ur berc'hentiezh kumunel, e vez eñ rannet a-vareadoù etre izili ar gumun c'hounezel, en doare ma tieka pep gounezerezh

<sup>22</sup> H. S. Maine, *Village-Communities in the East and West*, London, 1871.

ar parkoù gouzet dezhañ evitañ e unan hag e perc'henn ar frouezhioù anezho a-hinienn, e-keit ma vez kenderc'het a-stroll er c'humuniezhoù henaekoc'h ha na vez genlodennet nemet ar c'henderc'had anezho. Hevelep patrom kentidik eus ar c'henderc'herezh kevelourel pe strollel a voe, evel reizh, disoc'h gwanded an hinienn digenvez ha ne ket eus kevridekadur an araezioù kenderc'hañ.

Didro e kompren e c'hallfe an daouelezh enstag ouzh « ar gumun c'hounezel » he donezoniñ gant ur vuhez nerzhus rak diouzh un tu, ar berc'hentiez stroll hag an holl geñverioù kevredigezhel a zever diouzh se a laka he asied da vezañ solut, en hevelep koulz, an tiegezh prevez ha gounezerezh dastammadel an douar aradus ha perc'hennerezh prevez ar frouezh a zarbenn un diorroadur eus an hiniennelezh, anarazus da amveziadoù ar c'humuniezhoù kentidikoc'h. Met n'eo ket nebeutoc'h anat e c'hell an kez daouelezh dont da vezañ un eien a zigenaozañ. Estreget holl levezonioù ar meteier galen, daspugnadur dereziek nemetañ ar binvidigezh heloc'h a zeraou gant ar binvidigezh chatal (oc'h asantiñ da binvidigezh ar served), an devoud e tasperzh mui ouzh mui an elfenn heloc'h er gounezerezh hag ur bern amveziadoù all, dizisrannadus diouzh an daspugnadur-se met a vijen kaset re bell gant an arhebad anezho, a weredo evel ul loezer a 'r gevatalded armerzhel ha kevredigezhel, hag a c'hano e kreiz ar gumun ur c'henniñv a 'l lazioù a zelusk da gentañ amdroadur an douar aradus en ur berc'hentiez prevez hag a zisoc'h gant perc'hennadur prevez ar c'hoadeier, paskaduiour, fuajou, h. a., deuet endeo da vezañ stagadennoù kumuniezhel eus ar berc'hentiez prevez. Dre se eo ez emginnig e pep lec'h ar « gumun c'hounezel » evel rih nevesañ stummadur henaek ar c'hevredigezhioù hag e c'hoarvez mare ar gumun c'hounezel, e luskad istorel Europa ar c'hornog, hen hag arnevez, evel ur prantad ardreuziñ eus ar berc'hentiez stroll d'ar berc'hentiez prevez, evel ur prantad ardreuziñ eus ar stummadur kentael d'ar stummadur eilvedel. Met daoust hag ez eo lavarout e rank diorroerezh ar « gumun c'hounezel », heuliañ an hent-se e nep amveziadur ? Tamm ebet. He stumm amparus a zarbenn an dazeilad-mañ : pe an elfenn a berc'hentiez prevez a ampleg a drec'ho war an elfenn stroll, pe an eil a drec'ho war eben. Pep tra zo endalc'het gant ar metoù istorel m'emgav ar gwellañ lec'hiet... Gallus a priori eo an daou ziskoulm-se zo met evit an eil pe egile eo rekis, anat, meteier istorel disheñvel penn da benn.

3. Rusia eo ar vro european nemeti ma 'z eo arzalc'het ar « gumuniez c'hounezel » war ur skeul riezal betek hiziv. N'eus ket anezhi preizh un alouber estren e doare Indez ar Reter. Ne vev ket kennebeut goubarek diouzh ar bed arnevez. Diouzh un tu, perc'hentiez kumuniezhel an douar a ro tro dezhañ da dreuzstummañ diouzhtu ur gounezerezh dastammadel ha hiniennel en ur gounezerezh strollel, hag ar gouerion rusian en embreg endeo er pradennoù dirann ; neuziadur danvezel he douar a bed an tiekaerezh treloc'hel war ur

skeul vras ; boazadur ar gouerion gant kevrat an artel a aesa an ardeuzad eus al labour dastammadel betek al labour kevelourel, hag erziwezh, ar gevredigezh rusian, a vevas ken pell a-drugarez d'he ferzhiadur, a zle dezhi an astenn rekis evit un hevelep ardeuzad. Diouzh un tu all, kempredelzh ar c'henderc'herezh kornogour, a vestroni nevid ar bed, a ro tro da Rusia da enkorfañ er gumuniez an holl akuidoù yaus danzeet gant ar reizhiad kevalour hep tremen dre e *fouches caudines*.<sup>23</sup>

Mar bije nac'het gallusted damkanel emdroadur ar gumuniez ploueel arnevez degemennourion ar « bannoù kevredigezhel nevez », goulennet e vije outo : ha rediet eo bet Rusia, evel ar C'hornog, da dremen dre ur remziad hir a c'horadur eus ar greanterezh treloc'hel a-benn degouezhout gant ijinennoù, listri dre vurezh, houarnhentoù, h. a. ? Goulennet e vije c'hoazh penaos o deus graet a-benn ebarzhiñ, en ur serr lagad, hezoderezh an eskemmoù (bankoù, kevredigezhioù dre gevran, h. a.) en e pezh, a goustas kement a gantvedoù d'o danzen.

Bez' ez eus ur perzh eus ar « gumuniez c'hounezel » e Rusia he gwana, enebour dezhi e pep keñver. En abeg d'he digenvzeded eo, d'he diouer a liammoù etre buhez ur gumuniez ha hini ar re all, ar c'horrved lec'hiet-se, ne gaver e nep lec'h evel perzh enmanel eus ar rih-se, met a laka da zifoupañ a-us d'ar gumuniezhoù, e pep lec'h m'emañ, ur mac'homerezh mui pe vui kreizennet, e pep lec'h m'emañ. Kevredad republikoù rusian an Norzh a brou e vore kreñvaet an digenvzeded-se a hañval bezañ bet rediet en deroù gant brasted an tiriad, gant planedennoù politikel gouzañvet gant Rusia abaoe an aloubadeg vongoliat. Hiziv eo ur skoilh raskañ eus ar re aesañ. Bez' e rankfe hepken bezañ erlec'hiet ar *volost*<sup>24</sup>, ensavadur a 'l levrierezh, gant ur vodadeg kouerion dibabet gant ar c'humuniezhoù o unan hag o talvezout da organ armerzhel ha melestradurel evit o lazioù.

Un amveziad amsavus tre, diouzh ar savboent istorel, evit mirezezh ar « gumuniez c'hounezel » dre he diorroadur a-c'houdevezh, eo ez eo ouzhpenn bezañ kempred d'ar c'henderc'herezh kevalour kornogour hag e c'hell dre se perc'hennañ ar frouezh anezhañ hep emsujañ d'he modus operandi, met en deus treuzvevet d'an oadvezh ma emziskoueze c'hoazh didorr ar reizhiad kevalour, p'he [ar reizhiad kevalour, *nat*] c'havfe, er c'hontrol, en Europa ar c'hornog kement hag er Stadoù-Unanet, o stourm gant an engroezioù labourer ha gant ar skiant, ha gant an nerzhioù kenderc'hañ

23 Er bloavezh 321 a-raok hon oadvezh, e hent kev ar Furculae Caudinae, amezeg da gêr kozh Caudium en Italia, ar Samnited (meuriadoù oc'h anezhañ ur rannvro meneziek en Apenninoù krenn) a roas lamm d'al legionoù roman hag o lakaas da dremen dindan ar « yev », pezh a voe gwelet evel ur fallagriezh ramzel evit an arme drec'het. An droienn « tremen dindan ar ferc'hier *caudines* » zo tremenet er yezh evit dezverkañ barr an vezhekadenn.

24 *Volost* : pastell vro vaeziat en Henrusia, bihanañ unander tiriadel hag amaezhiadurel.

engehent ganti – en ur ger, en un enkadenn a zisoc'ho war (da wiriañ) he raskerezh gant un distro eus ar c'hevredigezhioù arnevez d'ur stumm uheloc'h eus ur rizh « henaek » eus ar berc'hentiezh hag eus ar c'henderc'hañ strollel.

Intentet eo e vefe graet emdroadur ar gumuniezh a-bazennoù hag e vefe ar bazenn gentañ anezhi he lakaat en amveziadoù reizh war he diazez bremanel.

Met en he c'heñver ez emwint ar berc'hentiezh c'hldel o terc'hel en he daouarn hogos an hanter anezhi ha gwellañ lodenn an douar, hep menegiñ domanioù ar Stad. Diouzh an tu-se eo e vo kemmesket mirerezh ar « gumuniezh c'hounezel » dre hent he emdroadur a-c'houdevezh gant luskad hollek ar gevredigezh rusian a zo he advevadur d'ar priz-se.

Zoken diouzh ar savboent armerzhel nemetken, Rusia a c'hell kuitaat he zoull sac'h gounezal dre emdroadur he c'humuniezh c'hounezel ; en aner e klaskfe e guitaat dre ar c'houmanant korvosavelet e giz saoz, rukunet gant holl amveziadoù gounezal ar vro.

Oc'h ezwerc'hañ al liested dienezel a vec'h bremañ ar « gumuniezh c'hounezel » rusian, hag o kemer e penn kont e stumm amparus hag he metoù istorel hepken, lakaet anat eo da gentañ penn ez eo unan eus he ferzhioù diazezel, perc'hentiezh an douar, a stumm diaz naturel ar c'henderc'herezh hag ar perc'hennañ strollel. Ouzhpenn se, boaz ar c'houer rusian da gevrat an artel a aese an emdroadur eus al labour dastammadel betek al labour strollel, a embreg eñ endeo en un dereziad bennak er pradennoù dirann, en heskadurioù hag embregerezhioù all a laz hollek. Met evit ma vo arlanket al labour dastammadel – mammenn ar perc'hennañ prevez – gant al labour, eo ret daou dra : ezhomm armerzhel un hevelep emdroadur hag an amveziadoù danvezel a-benn d'e gefleuniañ.

Evit a sell an ezhomm armerzhel a vo santet gant ar « gumuniezh c'hounezel » – zoken adalek an ampoent ma vefe lakaet en amveziadoù reizh, eleze bep ma vefe pellaet ar bec'hioù a bouez warni ha ma vefe degemeret un dachenn reizh he ampled da c'hounit. Tremenet eo an amzer pa na c'houlenne ar gounezerezh rusian nemet an douar hag e c'hounezel dastammadel armet gant binvioù mui pe vui kentidik. An amzer-se zo tremenet seul vuanoc'h ma vez minimet ha disperet e zouar gant mac'homerezh ar gounezel. Labour kevelourel a rank eñ kaout bremañ, aozet war ur skeul vras. Ouzhpenn se, hag araoketoc'h e ve ar c'houer gant dek gwech e niver a zegad<sup>25</sup> pa ra diouer dezhañ an dafar rekis evit labourat 2 pe 3 zegad ?

Met ar binviadur, ar c'hardell, an hentennoù gounezal, h. a., an holl araezioù diziouerus evit al labour strollel, pelec'h o c'havout ? Setu dres dreistelezh veur ar

<sup>25</sup> Gl. décat.

« gumuniezh vaeziat » rusian e-keñver ar c'humuniezhioù kentstad a un rizh ganti. Hi he unan en Europa zo manet war ur skeul vras, riezal. Emgavout a ra neuze lec'hiet en ur metoù istorel ma vez prestat dezhi an holl amveziadoù a labour strollel gant kempredelzh ar c'henderc'herezh kevalour. Enkorfañ a c'hell er gumuniezh an holl akuidoù yaus danzeet gant ar reizhiad kevalour hep tremen dre e *fourches caudines*. Neuziadur danvezel an douar rusian a bed un tiekaerezh dre arver binvioù treloc'hel aozet war ur skeul vras, embreget en ul labour kevelourel. Hag evit mizoù kentañ an ensevel – mizoù speredel ha danvezel –, ar gevredigezh rusian o dle d'ar « gumuniezh vaeziat » a vevas ken pell diwar he c'houst hag e-lec'h ma rank klask (war-lerc'h) he « elfenn advevaer ».

Ar wellañ prouenn e respont diorroadur ar « gumuniezh vaeziat » da luskad istorel hon oavdezh eo an enkadenn gollus gouzañvet gant ar c'henderc'herezh kevalour er broioù european hag amerikan m'he deus kemeret he lañs, enkadenn a echuo gant he raskerezh, dre zistro ar gevredigezh arnevez betek ur stumm uheloc'h eus ar rizh kentidikañ – ar c'henderc'hañ hag ar perc'hennañ strollel.

4. A-benn gallout emziorren e ranker bevañ da gentañ penn. Ha den ne c'hallje kuzhat an devoud e vez lakaet en arvar buhez ar « gumuniezh vaeziat » er mare-se. A-benn diberc'hennañ ar c'hounezion ned eus ket ezhomm d'o skarzhañ eus o douar evel ma voe graet e Bro Saoz hag e lec'h all ; n'eo ket rekis kennebeut freuzañ ar berc'hentiezh voutin gant un ukaz. Kit da skrapat d'ar gouerion frouezh o labour dreist d'ur vevenn bennak hag en desped d'ho c'h archerdi ha d'ho c'h arme ne zeot ket a-benn d'o rañjennañ d'o farkeier ! E diwezhañ mareoù Impalaeriezh Roman an dekurioned proviñsel ne voe ket kouerion hogen perc'henerion c'hldel a dec'has kuit diouzh o ziegezh, a zilezas o douaroù, a emlakas zoken er sklaverezh, ha kement-se a-benn emzizober diouzh ur berc'hentiezh na oa mui nemet ur sigur kefredel evit o gwaskañ, hep trugar na truez.

Adalek seurtanvet rezidigezh ar gouerion, ar gumuniezh rusian a voe lakaet en amveziadoù armerzhel direizh gant ar Stad hag abaoe an amzer-se n'he deus ket paouezet d'he bec'hiañ gant an nerzhioù kevredigezhel tolpet etre he daouarn. Faezhet gant preizherezhioù kemedel e teuas da vezañ un danvez divuhez a hegounezerezh aes (gant an trafikerezh, ar berc'hentiezh c'hounezel hag an uzurerezh. Ar mac'homerezh-se o tont eus an diavaez en deus dirollet e kalon ar gumuniezh he unan kann al lazioù bezant endeo ha diorroet buan e gellidoù dispennadenn. Met n'eo ket pep tra. Diwar holl goustoù ar gouerion, ar Stad [he deus prestat he harp evit ober, *nae*] he deus lakaet da greskiñ evel en ur brouti tomm brankennoù ar reizhiad kevalour

kornogour a zo, hep diorren takenn nerzhioù kenderc'hañ al labour douar, ar re azasañ da aesaat ha hastañ laerezh he frouezh dre hanterouriezhoù digenderc'hus. Kenlabouret he deus dre se da binvikadur un astuz kevalour nevez a sun gwad ar « gumuniezh vaeziat », ken paourraet endeo.

En ur ger, ar Stad he deus prester he harp da ziorroadur prim an araezioù kalvezel hag armerzhel azasañ da aesaat ha hastañ korvoerezh ar gouerion, da lavarout eleze nerzh kenderc'hañ brasañ Rusia, ha da binvidikaat ar « c'holonnennoù kevredigezhel nevez ».

5. Ar c'hengejad levezonoù distrujus-mañ, nemet e vefe torret gant un ersav galloudus, a rank dre natur disoc'hañ da varv ar gumuniezh vaeziat. Met emc'houlenn a reer : perak o deus an holl lazioù-se (oc'h ebarzhiñ an holl c'hreanterzhioù bras lakaet dindan gward al leviezh) kavet kement a splet e stad bremanel ar gumuniezh vaeziat, perak ez iriennfent gant gouzout a-benn lazhañ ar yar a zozv vioù aour ? Dres peogwir e santont n'eo ket kendalc'hus ar « stad bremanel-se » ha peogwir n'eo ket ken diouzh ar c'hiz ar mod bremanel d'e gorvioñ dre se. Dienez al labourer endeo he deus minimet an douar a emzisper. An eostoù mat a vez kempouezet gant an naonegezh. Keidenn an dek vloaz diwezhañ a laka splann ur gounezerezh maeziat ket hepken chag met argilus. Erziwezh, evit ar wech kentañ e rank Rusia enporzhiañ edeier e-lec'h o eziporzhiañ. Ned eus ket ken amzer da goll enta. Ret eo echuiñ gant se. Amparañ a ranker en ur rummad boutin maeziat bihanniver mui pe vui aezet ar gouerion hag o amdreñ en ur brasniver a broleterion hep frazenn. A-benn da se eo flatret gant « kolonnennoù kevredigezhel nevez » ar c'houlioù graet d'ar gumuniezh, kement se o vezañ un azon naturel eus he c'habac'hded.

Evel kement a lazioù liesseurt, ha dreist holl re ar « c'holonnennoù kevredigezhel nevez » savadennet dindan impalaeriezh kuñv Aleksandr II, o deus kavet o mad e stad bremanel ar « gumuniezh vaeziat », perak e teufent gant gouzout da iriennañ evit he marv ? Perak e flatr o degemennourion ar c'houlioù degemeret evel kement a brouenn diziarbennus eus he c'habac'hded naturel ? Perak e fell dezho lazhañ ar yar gant vioù aour ?

Rak an devoudoù armerzhel, a vefen kaset re bell gant an elfennerezh anezho, o deus lakaet hewel, tra ken, ar c'hevrin n'eo ket dalc'hus ken stad bremanel ar gumuniezh, ha ne vo ket ken diouzh ar c'hiz ar mod bremanel ma vez korvoet ar yoc'hoù poblek a-benn nebeut dre retvezh an traoù. Neuze ez eus ezhomm a nevez

hag an nevez silet dindan stummoù eus al liesseurtañ a zistro bepred d'an dra-mañ : freuzañ ar berc'hentiezh strollet, lezel da vihanniver mui pe vui aezet ar gouerion da amparañ en ur rummad boutin maeziat hag amdreñ al lod vrasañ anezho e proleterion hep frazenn.

Diouzh un tu, ar « gumuniezh vaeziat » zo kaset en dibenn diwezhañ ha diouzh an tu all, un irienn c'halloudus a chom war he api a-benn he feurgas. Evit saveteiñ ar gumuniezh rusian, e ranker un Dispac'h rusian. Evit ar peurrest, piaouerion an nerzhioù politikel ha kevredigezhel a ra o seizh gwellañ a-benn prientiñ an engroezioù d'un hevelep gwallreuz.

Er c'houlz ma wader ha ma vouevier ar gumuniezh, e tisperier hag e paourekaer he douar, lakizion lennegel « kolonnennoù nevez ar gevredigezh » a ziskouez gant gwenvrach ar c'houlioù degemeret gantañ evel kement a azonoù eus he c'habac'hded trumm. Haerñ a reer e varv dre ur marv naturel hag e vo trepetet mat o verraat he zremenvan. Amañ n'eo ket mui ur gudenn da ziskoulmañ ; un enebour da drec'hiñ eo hepmuiken. A-benn saveteiñ ar gumuniezh rusian eo ret un Dispac'h Rusian. A hent all, al leviezh rusian hag « kolonnennoù nevez ar gevredigezh » a ra o seizh gwellañ da brientiñ ar yoc'hoù d'un hevelep gwallreuz. Mar bez graet an Dispac'h d'un apoue dereat, mar tolpe e holl nerzhioù a-benn diogeliñ lañs frank ar gumuniezh vaeziat, hi a emziorroy a-benn nebeut evel elfenn advevadur ar gevredigezh rusian hag evel elfenn dreistelezh war ar broioù mac'het gant ar renad kevalour.

#### Respont peurglok Karl Marx da Vera Zassoulitch

8 Meurzh 1881  
41, Maitland Park Road, London N. W.

Keodedourez ker,

Ur c'hleñved nervennoù a 'm zag a-vareadoù abaoe an dek vloaz diwezhañ, en deus miret ouzhiñ a respont abretoc'h d'ho lizher eus ar Merc'her 16 a viz C'hwevrer. Kerse 'm eus da na c'hallout reiñ deoc'h un arhebad krak ha berr ha tonket da foranded ar goulenn a 'm eus bet an enor da zegemer diganeoc'h<sup>26</sup>. Mizioù 'zo e 'm eus prometet endeo ul labour a-zivout an hevelep dodenn evit Kengor Sankt Peterbourg. Koulskoude e spian ma vo a-walc'h al linennoù-se da na lezel deoc'h mar ebet a-zivout ar c'hammglev tro dro da 'm damkaniezh seurtanvet.

26 N'hon eus ket gallet kavout ha treiñ un destenn glok ha troadus.

Oc'h elfennañ geneliezh ar c'henderc'herezh kevalour e lavaran : « E sol ar reizhiad kevalour ez eus an disrann krenn etre ar c'henderc'her hag an araeziou kenderc'hañ... diaz an holl emdroadur-se eo diberc'hennadur ar c'hounezion. N'eo bet peursevenet en un doare boniek nemet e Bro Saoz... Met holl vroioù all Europa ar c'hornog a ergerzh an hevelep luskad » (*Ar C'hevala*).

Bevennet strizh eo « tonkadur istorel » al luskad-se zo e broioù Europa ar c'hornog. Perag an kez bevennerezh zo skrivet en arroud-mañ eus ar penad XXXII : « Ar berc'hentiezh prevez, soliet war al labour hiniennel... zo o vont da vezañ distroadet gant ar berc'hentiezh prevez kevalour, soliet war gorvoerezh labour an amgen, war ar c'hopradelezh ».

El luskad kornogour-se ez eus anv eus treuzstummadur un stumm perc'hentiezh prevez en ur stumm perc'hentiezh prevez all. Gant ar gouerion rusian hor befe er c'hontrol da dreuzstummañ ar berc'hentiezh stroll e perc'hentiezh prevez. An elfennerezh roet er C'hevala ne ro enta abegoù nag evit nag a-enep buhezegezh ar gumuniezh vaeziat, met ar studiadenn dibar a 'm eus graet hag a 'm eus klasket an danvez en dielloù diles eviti he deus va c'hendrec'het eo ar gumuniezh-se an harp evit an advevadur kevredigezhel e Rusia ; met a-benn ma c'hallo arc'hwelañ evel henn e rankfe da gentañ raskañ al levezonoù argevezus he arsailh a bep tu, ha da heul diogeliñ dezhi stadoù reizh un diorroerezh trumm.

An enor zo ganin, keodedourez ker, da vezañ ho hollemouestlet.

Karl Marx  
Brezhoneg gant Gwendal Piégais<sup>27</sup>

<sup>27</sup> Trugarez da Malo Adeux evit aked ha pasianted e adlennadenn.

# NIDIAD


*Kelaouenn lennegel trimiziek.*

Kadoriad : Gwendal Piégais  
Sekretour : Malo Adeux  
Teñzorier : Hoel Mahe

**NIDIAD BREIZH**  
**33 straed Lorraine**  
**44000 NAONED**

Kasit ho chekennoù e gourc'hemenn **NIDIAD**.

Priz reel : 5€  
Koumanant bloaz, Frañs : 15€  
Koumanant bloaz, broioù all : 16€  
Studierion, dic'hweleion : 12€  
Aozadurioù sevenadurel, levraouegoù, kevarzheoù ha strollezhoù : 21€



*Darempred :*

**nidiad.gwe@gmail.com**

